



Kargad-ez war an diorren

Kinnig labour embannet d'an / ar dimanche 01 juin 2025

Lec'h : **Pellabour**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **6 miz**

Kerkent ha posubl

Deskrivadur ar post-labour

Ur c'hevread kevredigezhel, laik, digoust ha digor d'an holl eo Diwan. Hiziv an deiz ez eo an hentenn gelenn nemeti o kinnig deskiñ brezhoneg dre soubidigezh. Krouet 48 bloaz zo, ez eus hiziv e Diwan 46 skol, 6 skolaj ha 2 lise, dasparzhet war ar 5 departamant breizhad.

Da geñver ur c'hresk obererezh berrbad liammet gant digoradur daou di-skol nevez - ur skolaj e Beuzit ar c'hoadoù (35) hag ur skol e Orvez (44) - emañ Diwan o klask ur g-c'hargad-ez war an diorren. Pal ar c'hefridi-mañ a zo liammet gant digoradur an daou di-skol-se hag ar c'hefridioù a-bep seurt da gas da benn, en o zouez : reiñ nerzh ha bodañ tud ar skolidi nevez, ambroug anezho pa rankint mont e darempred gant obererien ensavadurel.

Dindan atebegzh renerezh ar c'hevread e labouroc'h evel kendivizer-ez kevredigezhioù merañ ar skolioù hag e voc'h ivez un hanterour-ez etrezo ha servijoù ar c'hevread.

Ho kefridioù a vo dreist-holl :

Kreñvaat ar skolioù a zo anezho dija :

Sikour ar skolioù da aozañ an dorioù digor ha bremakeat teul an dorioù digor asambles gant ar gargadez war ar c'helaouiñ
Kuzuliañ hag ambroug diorren ar skolioù
Heñchañ ar gerent a-youl vat war-zu servijoù ar gevredigezh p'o deus da ober gant difraeoù teknik.

Dastum titouroù dre enklaskoù a c'hello bezañ savet diwarno taolenoù hag ostilhoù stur evit a rouedad Diwan

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Doare den :

En ho aes emao'h gant an dud, plijet gant ar brezhoneg ha mennet da ziorren anezhañ.

Ret eo mestroniañ ar brezhoneg evit ar post-mañ. Emren hag aozet mat, e ouezit en em reiñ ivez e raktresoù sevenet a-stroll.

Ur stummadur mererezh raktresoù pe ur skiant-prenañ war kefridioù diorren er bed kevredigezhel a vo deuet mat evit ar post-mañ.

Tirouroù all :

Kevrat berr bad leun amzer
Padelezh : 6 miz
Devezh kregiñ : kerkent ha posubl
Gopr : 1 836.19€ kriz miziek
Lec'h labour : Pellabour
Takad labour : Breizh uhel

Rankout a reoc'h mont en tiez skol hag e Gwened hag e Landerne diouzh an ezhommoù.

Ma oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur (CV + lizher emginnig) da tuta@diwan.bzh (<mailto:tuta@diwan.bzh>) **a-raok an 2 a viz Gouere 2025.**